

Disput
Etre eur Martolod hag eul Labourer.

(246, suite)

Var ton Chanson ar Marquis Dantin.

Bonjour, va mignon Martolod,
Antreit en ti da dibri yot,
Ha da gonta ar marvailhou
Oc'h eus quelet partout dre 'n mor
En ho campagnou a enor,
Ne voa get bras ho labour.

(247)

Mar comzit din eus va labour,
Labourer, emma ho peg en dour,
Hag e renget carvet sicour
Da zispuit eus ar Martolod;
Na rit get a re gōfat yot,
Pe oc'h serten en collot.

Ar yot n'ey des get uy dra fail,
Falloc'h eo guespet ha qic'sal,
Zo boïed ar verdaïdi;
Lies dour brein ous ho sec'het,
Leun a gontron hag a brenvet;
Ha gras dezgo e gavet.

Estoni a rân, Labourer,
Rag ma tîprijit hor micher,
Ha gouscoude eo neseser;
Beza eo unay ar gaera
Eller da gompren er bed - m̄a,
Mont er mor da naviga.

(248)

Plam bezo va falz ha va mar,
Erit labourat an douar,
Me a ra goab eus ho regal.

Ho tillad a vez godronet.
 Gant an ther, donjer eo o quelet,
 Gen a spont ar plac'het.

Eur Martolod a zo lijer
 Ha vigilant e peb afer,
 Ha ne get al Labourer,
 E zillat a vez saliset,
 Donjer ameus ous e velet.
 Gant an oll eo disprijet.

(249)

Gwir a livirit, Martolod,
 Ha goucoude gementse tout
 A rang caout al Labourer;
 En a rang beva ar jeneral,
 En eur labourat an douar
 Gant ar c'hoer, a gorn e dal.

Oc'h etat a zo disprijet,
 N'oc'h get da veza estimet
 Evel ar Vartoloded;
 Ar reze o deus cals a honor
 Var an douar ha var ar mor,
 Ha boüed mat d'ey em sicour.

Gonit a rit, va Martolod,
 Deomp da finisa hor pilog.
 Hag achuomp hor procès.
 Disprijet eo al Labourer,
 Ha goucoude eo neseser
 Da veza an oll er c'hartier.

(Vol. I, p. 246-249.)